

An tour Plomb.

(f° 156)

Kenta vellas an tan en tour plomb
voa eur c'hloarek he distrei deus rom.

A lavaras da Kemper illiz
e man krog an tan en ho c'hillis

E man krog an tan ebar en tour
Na vo ket lazhet evid dour

Gant bara gwimis ha les bron
e voa lazhet an tan en tour plomb.

Nag ar Sakrist a lavare
Dan otron personn eun deis a voe :

me a vel an erouan var beg an tour
hag en enon evel eur skour.

An otron personn a lavare
Dan otron Kure eun deis a voe :

— Kerc'h ar Siboëro hag ar Sakramant
Da chassal an erouant.

An otron Kure a levere
Dan otron personn eun deis a voe :

me non ket evid entren aman
Gant ar plomb berrvet e diveran
hag e lec'h ma koves dewi a ra.

(f° 157)

An otron personn a lavare
Dan erouant an deis a voe :

107

Petra klaskes var dro va zi
me nen dan ket var dro da hini.

— Da ti-te a zo diviniget
Gant eur plac'h iaouank hag eur kloarek
O pec'hi eni noz nedelek.

—
7

Jannet Puill, Klasqueres, a henrik 13 gwenver 1851.